

T. Le Garrec

Taolenn

Son al lann

Ar spern gwenn

Bleun ed-du

Gwerz war Stad ar Brezoneg

An delenn hag ar barz

Son al lann

War don : Podad-lêz, Prosper Proux.

Da veulodi, lann aour melen,
A rank diston war va zelenn ;
Da gaerder atao a ganin
Tra vo mouez ha buhez ganin ;
Te 'zo, 'gav din, penn-kil-ha-troad,
Heñvel-touet ouz ar Breizad.

Te n'eo ket brao lemel ganit
Kregi ennout 'zo dihonid :
Bezañ 'teus ivin hir ha lemm,
Penn hag a bik, drein hag a flemm ;
Red eo ivez bezañ paotr mad
'Barz dond a-benn euz ar Breizad.

Hogen, mar deo da stumm direiz,
Te 'zo kalon vad en ez kreiz :
Diwarnout e teu lâz d'ar zaout,
Troad d'ar hezeg ha gloan d'ar maout ;
E galon ha zoken e wad
A oar rei ivez ar Breizad.

Pe ve divalo pe ve brao,
Te 'vez bleuniou warnout atao,
Bleuniou alaouret ha seder,
En o zouez 'kan an alhweder ;
Bleunia 'vel-se 'ra da beb oad
Huñvreou e spered ar Breizad.

Te 'houl, 'benn chom yah ha digor
Avel menez pe avel mor :
Pell euz da vro ne rafes ken
'Med dizeha gand an anken ;
'Veldout ne vez laouen ha mad
Nemed en e vro, ar Breizad.

Pa gan en ez kreiz an avel,
Moueziou kuñv a deu da zevel,
A-wechou karget a zaero'
Pe heñvel ouz klemm tud varo ;
Meur a wech ivez d'huanaad
En em daol telenn ar Breizad.

Breudeur om eta penn-da-benn,
Gand eun heveleb planedenn
Staget ouz ar memez douar,
Dindan ar memez heol klouar :
Rag-se, da fleurenn 'vo dalhmad
Fleurennig karet ar Breizad.

Ar spern gwenn

War don : Kaourantinig.

Kaerra tar am-eus bet kavet
Abao an deiz ma oan ganet,
Kaerra tr am-eus bet karet ;

Eo, da viz Mae, deuz ar beure,
Gweled ken koant hag eun huñvre,
Glizennig Vae war he gorre,

Eur fleurennig ken glan, ken gwenn,
Ken dudiuz ha ken laouen,
Eur fleurennig war ar spern-gwenn,

Gwisket ganti eur gorrvennig
Sort 'n he-devez ket plah pinvidig,
Digor ganti he halonig.

'N eur daol en avel eur c'hwez-vad
A bik kalon an tremeniad,
'N eur daol en êr he "devez mad" ;

'N eur lavared d'ar reuzeudig,
D'an hlasker-boued, d'ar hlañvidig,
'N eur lavared : "C'hoarz 'ta, kêzig !

C'hoarz 'ta ouz dousder ar vuhez,
Eet eo kuit ar goañv didruez ;
C'hoarz ouz madoberou Doue !

Va hwez-vad a zoug madelez,
Ha va yaouankiz, levenez,
Ha va zae wenn, pinvidigez !

O ! mar chomfe bepred en êr
C'hwez-vad ha bleunigou tener,
O ! mar padfe 'n nevez-amzer !

Mez ar bleun 'nij gand an avel,
Ar c'hwez-vad ehan da zevel :
Bleun ar spern gwenn a rank mervel.

O wel'd bleun ken buan hijet,
Am-eus bet aliez soñjet,
O wel'd c'hwez-vad ken pell nijet,

Er merhedigou yaouank-flamm
'Vez dilammet digand o mamm,
Merhedigou koant ha divlamm,

Ne chom war o lerh netra 'bed
Nezmed an eñvor, kuñv meirbed
Deuz ar c'hwezig-vad a oa bet !

Bleun ed-du

War eun ton deuz Kerne.

En Kerne ‘weler parkadou
Ed-du sammet a-vokedou.

Bokedigou koant ha gwerh,
Gwenn evel al lêz, glan evel an erh ;
En Kerne ‘weler parkadou
Ed-du sammet a-vokedou.

Pa zon ar hreisteiz tro-war-dro,
Pa gan an añjeluz er vro,
E sav ‘kreiz an heol skeduz
Eur vouez don ha kaer, eur vouez vurzuduz,
Pa zon ar hreisteiz tro-war-dro,
Pa gan an añjeluz er vro.

Eur vouez greet gand oll vouezigou,
Kant-mil a ganaouennigou,
Ha na reont nemed unan,
Tremenet enni kalon ar gwenan,
Eur vouez greet gand oll vouezigou,
Kant-mil a ganaouennigou.

Ken dous e sav ar ganaouenn
Ma taol c’hwez-vad en oabl laouen,
C’hwez mel ha c’hwez plijadur,
C’hwez kement tra vad a zo en natur ;
Ken dous e sav ar ganaouenn
Ma taol c’hwez-vad en oabl laouen.

Ar ganaouenn a zo ken kaer
Ken, ouz he selaou, e ranker
Chom sebezet d’huñvreal
‘Vel pa ve Doue ‘vond da gaozeal ;
Ar ganaouenn a zo ken kaer
Ken, ouz he selaou, e ranker.

Ken luskelluz e talh he han
Ma teu ar wazig dour d’ehan,
Hag al lapous da devel,
Hag an êzennig da hun¹, da vervel ;
Ken luskelluz e talh he han
Ma teu ar wazig dour d’ehan.

Reo an noz, reo ar prajeier,
Kouskit ivez ‘n ho toureier² ;
Na daolit ket hoh alan
War ar bleuniou gwenn, war ar bleuniou glan,
Reo an noz, reo ar prajeier,
Kouskit ivez ‘n ho toureier ;

¹ hun : huanadi.

² ho toureier : ‘n ho touriou (liester “dour”).

Vid ma pado pell va huñvre
Ha levez va bro Gerne,
Hag ar c'hwez-vad dre an êr,
Hag ar bleunigou gwennig ha tener,
Vid ma pado pell va huñvre
Ha levez va bro Gerne.

Gwerz war Stad ar Brezoneg

War don : Êlez deuz ar Baradoz, etc...

I

Eur vro dispar a lugern e-touez an oll vroioù,
Luskellet en heh huñvre gand mouez don ar morioù,
Paket he fenn intañvez en eul lenn vougenn hlaz,
Hag o son war eun delenn hirvouduz 'vel eur hlaz.

Koulskoude, he-deus mibien gand Doue dibabet,
Dre ma oant tud hallouduz, da ziwall garz ar bed,
Netar barreg d'o sponta na barreg d'o diskar,
Nag e teufe da goueza an neñv war an douar.

Koulskoude, en peb amzer, 'talh enni da zevel,
Bleunioù aour leun a zudi, bleunioù gwenn leun a vel,
Ha da bignad er hlazenn, lemm evel noadeier³,
Tourioù kaer dantelezet leh ma kan ar hleier.

Koulskoude, 'n he fardonioù, 'vez gwelet a-vagad
Ar c'hoanta gwiskamañchou 'zo bet dirag lagad,
Ar merhedigou flourra 'deus c'hoarzet d'ar vuhe',
An terrupla tud yaouank krouet dre zorn Doue.

Koulskoude, gand he bombard pa hwez ar biniou,
E nij ar gorollerien war askell o zonioù,
Ha war beg he menezioù pa gan he mesaerien,
E toull dor ar Baradoz 'tispak selaouerien.

Perag eta chom kañvuz 'tal on mamm Breiz-Izel,
Perag war an Tremenet e taol bepred he sell,
Perag e talh da jali : « Gwechall, gwechall, gwechall ! »
Netra, 'med emañ gwasket he yez gand yez Vro-Hall.

II

Eun devez, e tremenis e-kichenn eur houldri,
Bet ennañ 'pad tri-hant vloaz dousder ha koantiri,
Bet ennañ dre vilierou koulmed gwenn o kluda,
Ha mouezioù kuñv damantuz noz ha deiz o vruda.

Pebez souez pa glevis diabarz ar houldri
O sevel en eur goaga mouezioù raouiet ha kri',
Ha pa welis o vale pe o nijal tro-dro
Brini du, brini loued, lapoused a varo !

Trehet e oa bet gante ar hudennigoù⁴ gwenn,
Mouget o han, o gizioù, peb eñvor deuz o gouenn ;
A gantvejou eürusted ne chome ken, allaz !
Nemed, 'touez al loustoni, pluñvigou gwenn ha glaz.

Ha me kerkent da zoñjal en Breiz, va bro garet,
'Zo ivez gand ar galleg he yez koz mastaret,

³ noadeier : nadozioù.

⁴ ar hudennigoù : ar houlmed.

Hag e vez klasket bemdez, dre bep sort troiou kamm,
Lakaad he gizioù kaerra da goueza tamm-ha-tamm.

« Ma vije bet, emezon-me, leh tammou kudenned,
Tud a boell hag a galon, sort m'eo ar Vretoned,
'Dije biskoaz aotreet divroiz d'o debri,
Na lapoused divalo da ren en o houldri. »

Mez den ebed ne gredfe penn-oh-penn ganem-ni
Deuz ar brezoneg santel 'n em lakaad d'enebi,
Rag biskoaz n'eo bet Breiziz trehet 'med a-guz-kaer ;`
Hogen, an tu d'he flastra dre zindan a glasker.

Er skolioù eo bet kavet an noazusa doare
Da skei gantañ heb ehan taolioù dudrugare' :
Skolêrien, skolêrezed, 'zo mistri a vrezel
Roet deze 'vid kevridi laza yez Vrezi-Izel.

Hini Vro-Hall 'deu warnom, dre lannou⁵ dirollet,
En em holo bep kammed douar ganeom kollet ;
Mor braz ar skridou galleg a zired euz Pariz,
Pounnerroh 'vid an hini 'zistrujas ar Gêr-Iz.

Breiziz zoken a glever war o yez ober fae,
Gwerzet gante o fluenn, hag o zeod hag o fe' ;
Kreñvaad 'n on touez 'ra bemdez koagerez ar brini :
War zao, dubeed Arvor, divranom⁶ or houldri !

III

Dilamm on yez ganeom-ni 've dilamm on ene :
Petra 'larfe d'ar Breizad ar mor, nag ar mene',
Nag an avelioù garo nag an noz spouroneg,
Ma vije ken d'o finta ar gerioù brezoneg ?

Kollet o yez venniget, 'varvfe e oll dudi⁷ ;
Ne vefe ken na c'hoarzin, na karoud, na pedi :
E zent koz en ilizou a drofe kein dezañ,
Hag e anaon⁸ a ouelfe 'n o gwele diwezañ.

Petra 'larfe d'e galon bombard na biniou,
Koroll na c'hoariadeg, kleier na pardonioù ?
Beteg e wiskamañchou n'o-defe penn na troad :
Breiziz en Breiz a chomfe evel eun divroad.

Mar on-deus 'ta, kenvroiz, c'hoant miroud war on zro
Kement zo bet a-viskoaz nerz ha kaerder on bro,
Diwallom on brezoneg, stourmom 'vid hen divenn,
'Vel ma stourme on zadou, 'n eur hopal : « Torr e benn ! »

Meur a wech 'zo goulennet digand mistri Vro-Hall
Rei deom kemend a wirioù hag a roer leh all :
Van ebed n'o-deus greet c'hoaz dimeuz on fedennou,

⁵ lannou : gwagennou.

⁶ divranom : kasom kuit ar brini.

⁷ e oll dudi : dudi ar Breizad.

⁸ anaon : anaon ar Vretoned.

Mez, mar geo yen o halon, ni 'zo tomm on fennou.

Pennou tomm, divreh kaled, dre on hannaderien
Ni rank trouzal ha c'hoari, dalhen horz gand ar yenn⁹¹⁰,
Ken a dreuzo douskouarn ar Hallaoued bouzar ;
Ha gwaz d'ar gannaderien a gomzo re glouar !

Pep hini 'neze 'zo galvet da zivenn gwir e vro ;
Neb na garo ket ober 'vo degaset en-dro ;
Rag ni 'n-eus geriou santel divizet mad gwechall,
Pa brizas on Dukezig sevel war dron Bro-Hall.

Neuze 'n-evoa 'e brezoneg hepken urz da ziston
Dindan ar goabrenn deñval krouet 'vid ar Breton :
Ar Gall a ranke goulenn aotre 'benn kaozeal ;
Hag e fell dezañ hirie minella ar re all !

Netra ken na houlennom 'med bezañ selaouet ;
Rag biskoaz fae n'on-deus greet war yez ar Hallaoued ;
Evid he homz e trehom zoken war o gorre,
On skridou 'vez en galleg peurvuia beh¹¹ d'o re.

Netra ken na houlennom, 'med e vo 'n on skoliou
Dezu brezoneg en galleg troet ar henteliou :
Gand ma vefont lakaet o-daou war eun heveleb troad,
Biken ar yez vrezoneg ne varvo 'n on broad.

Nann ! biken ne zizeho mammenn veo ar soniou,
Biken ganeom ne davo bombard na biniou,
Ha dindan on heol klouar 'vo dalhet da youhal,
'N eur gana kanaouennou, 'vel en amzer gwechall.

Neuze 'viro Breiz-Izel he stumm hag he gizioù,
Sent ar vro 'chomo laouen e deun an ilizou,
Breizad qa vano Breizad, ma hallo e dud-koz
Hen anzav, hen anavezoud, pa deuy 'n o Baradoz !

IV

Mistri Vro-Hall, deuz ouzom na veh ket re zireiz,
Rag hoh harpou nerzusa 'zo bet atao en Breiz ;
Oh espern ar sort mibien, gounid ne rafoh ken :
On gwad 'zo deoh pa garfoh, on yez deom da viken !

⁹ yenn : genn.

¹¹ beh : ? (Marteze eur vi-koukoug).

An delenn hag ar barz

An delenn

Sav alese, barzig ; tenn din euz va halon
Ar veulodi gaerra hag al lirezinna son.

Ar barz

Na perag kana ken ! 'Rafem ket well ehan,
Peogwir den, pa ganom, ne zelaou ouz on han ?
Koulz eo terri dioustu va fluenn dizehet,
Ha mouga 'vid eur wech da vouez ankounac'haet.
Trubard eo ar bed oll e-keñver ar varzed :
Euz a-dost o meuler, 'dreg o hein 'vo c'hoarzet,
Ha, mar bez sellet piz, war o fenn ne gaver
'Med eur gurunenn spern 'vel hini on Zalver.
Kanet a-walh on-eus on-daou war an douar
Evid eur bed goapaer ha kalonou klouar ;
Er bed all, unanet gand laz-kan' an êlez,
Ni 'zavo gwerziou kaer 'hed ar beurbadelez !
Daoust hag ar barz a gan 'vid bezañ selaouet ?
Gra 'vel an eostig-noz : e vouezig alaouret
Ne oar ken c'hwitellad soniou a garantez
Nemed pell euz an trouz, euz an dud, euz an deiz ;
Gra 'vel an alhweder, a gan 'toul dor an neñv,
Pa ne glev ket tro-war-dro 'med sioulder ar mene'.
'Vid ar bed da hoapaad, 'vid an dud da hoarzin,
Bale war roudou digoret gand Marzin :
Kan atao kement tra 'zo da vezañ karet,
Ha sav da benn, n'eus forz petra 'vo lavaret.

Ar barz

Ha petra 'ganin dit, va zelennig feal ?
Kement son kaer a oa 'deus paket ar re all.
Dre liorz ar varzed ar haerra sperejou
O kutuill an oll frouez hag an oll bokejou,
N'o-deus lezet netra gand ar re ziweza
'Med traou koz hag a lak al lenner da fêza.
Kaer 'm-eus sevel va fenn etrezeg ar stered,
Digomz eo va genou, goullo 'chom va spered.

An delenn

N'eo ket er penn, n'eo ket er genou e klasker
Pa ver en gwirionez c'hoantaus da draou kaer ;
Tostoh d'ene an den, donnoh en dibarz,
'N hini 'klever e vouez a dle dihun ar barz.
Er galon 'n hini 'sav mammenn ar wir vuhez,
Moueziou ar Vad, an Eun¹², ar Haeder, an Druez :
Selaou pegen skiltruz e sonont en ez kreiz
Ha kan, nag e ve ken, 'vid meuli da vamm Breiz !

Ar barz

Senti 'rankan ouizt ha, daoust d'ar bed gopaer,
Euz a deun va halon e kanin va bro gaer.

¹² an Eun : an hini a zo Just.

War-zav, va zeleññig ! ro din nerz ha skoazell,
Ha kanom unanet meulodi Breiz-Izel !